

D'an 3 a viz Mae

- **Gouel an ebestel sant Fulub ha sant Jakez**, Ebestel, merzherion.

Fulub, ganet e Bethsaïd, diskibl sant Yann-Vadezour, evel Pêr hag Andrev, a voe galvet gant an Arloz da vont war e-lerc'h. Meur a-wezh en Aviel e vez o klask lakaat ar C'hrist "*da vezañ gwelet*" pe "*gwelout an Tad*."

Jakez, anvet "ar minor", a ouarnas Iliz Jeruzalem hag e vez lakaet war e anv ul lizher eus an Emglev Nevez. Hervez hengoun an *trinubium*, e oa evel Jud, mab Alphe ha Mari Kleofaz, merc'h santez Anna eus e eil eured gant Kleofaz breur sant Jozef.

Gwezhall e vezent goueliet d'ar 1^{añ} a viz Mae da-geñver treuzlec'h o relegoù e brientiliz an Daouzek Abostol e Roma.

- E 115, e Roma war ar *Via Nomentane*, merzherenti **sant Aleksañdr I^{añ}**, pab.

E gorf a voe toullet a daolioù minaoed en o lakaas da c'houzañv e-pad hir amzer. En diwezh e voe dibennet gant daou veleg **sant Evenz ha sant Teodul**.

- E 286, en Antinoe e Tebaid e Bro Egipt, merzherenti **sant Timozeos hag e wreg santez Maor**, merzherion.

Lenner e oa Timozeos da vare heskinadeg Diocletianus. Dre ma nac'has reiñ al Levrioù Santel e voe jahinet war un dro gant e wreg, en aner avat. Ar barnour a roas urzh d'o c'hroastagañ an eil a-dal d'egile oc'h eveshaat d'o lezel da vervel goustadig. O verzherenti a badas neuze nav devezh leun.

- D'an 3 a viz Mae 326 e Jeruzalem, **dizoloidigezh ar Groaz Santel** gant santez Helena, mamm an impalaer Kustentin.

- En VIII^{vet} kantved, **sant Ethelwin pe Elwin**, eskob Lindsey, mignon sant Egbert. Mont a reas d'en em stummañ e manatioù Iwerzhon.

- E Kembre, distro da Zoue ene **sant Kollen**, eskob. Kv parrez Langolen, e bro-C'hlzig.

- En Iwerzhon, e 520, **sant Konlae** (Iw. Conlaedh ; Gl. Conleth), eskob Cill Dara.

Prizet e oa gant eskibion e rannvro hag e voe galvet gant santez Berc'hed da harpañ buhez speredel e vanati hag ar re all diazezet ganti. Kv parrez « Saint-Gonlay », Porc'hoed Sant-Mac'hloù.

- E hanternoz enezenn Vreizh (Bro-Skos), e 563, **sant Skannal**, manac'h diskibl sant Koulmkell en enez Iona.

- E Breizh, e 1723, **an Tad Gabriel**, beleg misioner Kabusin, diazezour Kenvreurizh ar Groaz e Kintin, a varvas e-doug ur mision e parrez Ar Voudenn nepell diouzh Loudieg lec'h ma voe sebeliet.

- E 399, **diazezidigezh Abati Lokeltaz Rewiz** gant Grallon roue Kernev.

- E 1897, **Diazezidigezh Abati Santez-Anna Kergonan**.

D'ar 4 a viz Mae

- En III^{de} kantved, e Tarsiz, merzherenti **santez Pelajia**.

Kefrizet e oa ouzh unan eus mibion Diocletianus pa c'houlennas bezañ badezet. Dre m'he doa kuitaet gwiskamant he dere evit dilhad eeunoc'h e voe diskuliet. An impalaer he lakaas da glozañ en un ejen arem a voe goret en tan evit he dêviñ.

- War-dro 304, e Nikaia e Bitinia, war aodoù kreizteiz ar Mor Du, merzherenti **santez Antonina**. Dre ma nac'has kinnig an ezañs d'an idolennoù e tiwaskas meur a voureviadur a-raok bezañ dêvet ez vev en diwezh.

- E 309, merzherenti **sant Silvanus** (Gl. Sylvain), eskob Gaza, lakaet d'ar marv gant 39 c'heneil. Kondaonet da vengleuzioù Pheno e voent holl dibennet war un dro war urzh ar C'haezar Maximinius Daïa.

- War-do 304, e Lorch e rouantelezh kelt an Norig (Noricum e latin), merzherenti **sant Florianus**, patrom pomperion ha bierourion Bayern hag Aostria. Gant e vreur **sant Florantinus** en dije kresket war ribl an Danav. Hag int soudarded roman e voent kondaonet d'ar marv gant ar prefed Aquilianus dre ma nac'hent kinnig un aberzh d'an idoloù. Goude bezañ bet jahinet o-daou e voent kaset da vezañ beuzet er stêr Enns hogen e voe dieubet Florantinus dre vurzhud tra ma voe taolet Florianus en dour, ur maen bras ouzh e c'houzoug. Kehelet e vez e Krakovia lec'h ma voe treuzlec'hiet e relegoù.

- E 716, **sant Ethelred**, roue Mersia war-lerc'h e dad Penda, breur santez Kineburg ha santez Kineswid.

E 704, goude bezañ renet e-kerzh 30 vloaz, ez eas da abati Bardney lec'h ma tremenas dibenn e vuhez.

- E Breizh, war-dro 535, **sant Hernin** - pe Hernan - marteze genidik eus Iwerzhon e teuas eus Kembre da ren ar vuhez penitiour e Lokarn e Kernev lec'h m'emañ c'hoazh e relegoù.

- En Devnon (Kernev-Veur), er VI^{vet} kantved, merzherenti **sant Mereal pe Melear**.

D'ar 5 a viz Mae

- E 386, **sant Brezhon** (Lt. Brito ; Gl. Britton), eskob Trevires, a zifennas e dropell diouzh fazioù Prisilan. Sant Ambroaz ha sant Varzhin a zeuas d'e weladenniñ.

- E 449, **sant Hiler Arelate** (Arles), eskob.

Ganet e Belgia eus un tiegezh hellazat a orin ez eas da heul sant Honorat, ma oa kar dezhañ, war Enez-Lerina (Lérins). Anvet eskob enep dezhañ e kendalc'has da vevañ er baourentez, o labourat gant e zaouarn, gwisket e-pad ar goañv evel e-pad an hañv, aketus d'ar bedenn, d'ar yun, roet da vinistrerezh ar prezeg o tiskouez d'ar bec'herion trugarez Doue.

- War-dro 702, **sant Maurand pe Mauront**, diagon hag abad e Flañdrez.

Badezet gant sant Ricarius e tremenas e vuhez e Flañdrez, e vro c'henidik. Goude e studioù e voe kaset da lez ar roue Klodwig II a Vro-C'hall a-raok mont da vanac'h e manati Breuil ha da c'houde en abati Marchiennes lec'h ma voe abad.

- E 1260, **santez Jutta - pe Judit - von Sangerhausen**, manac'hez beneadat e Polonia, patromez Prussia.

Genidik eus Bro-dThuringen e voe intañvezet yaouank hag e kuitas he bro evit mont betek Kulmsee, hiziv Chlemza e Polonia, da gaout he breur a oa mestr meur an Urzh Teutonek. Eno e tiazetas ur manati hag un ospital.

- E Breizh, gouel **sant Visant Ferrer**, dominigad a Vro-Valensia, prezeger helavar o c'hervel d'an distro ouzh Doue. E Breizh eo e tremenas e zaou vloavezh diwezhañ hag e varvas e Gwened d'ar 5 a viz Ebrel 1419 lec'h ma vez miret e gorf en iliz-veur. Kenbatrom kêr hag eskobiezh Gwened ez eo.

- En Devnon (Kernev-Veur), er ^{V^{vet}} kantved, **sant Hedreg**, feizvonnour.

- Er ^{VII^{vet}} kantved, **sant Endal pe Enoal**, diskibl sant Koulman.

- E Breizh, d'ar 5 a viz Mae 1652, **dom Mikael an Noblezh**, beleg, kentrador Misionoù Breizh, ganet e Plougernev e Bro-Leon d'an 29 a viz Gwengolo 1577 ha marvet e Konk-Leon. Avielañ a reas e vro e-doug un hanter gantved, 25 bloaz e Douarnenez o reiñ lañs d'an doareoù nevez a voe implijet war e-lerc'h gant an Tad Maner ha luskad Misionoù Breizh: prezennoù harpet gant taolenoù kentelius, kantikoù speredel o tegeriñ d'ar vuhez a orezon, prosesionoù gant arvestoù meur.

D'ar 6 a viz Mae

- **Gouel sant Yann Porta Latina**, eleze kounidigezh merzherenti an abostol Yann, gouel al lizhennererion hag ar goarion.

War urzh an impalaer Domitianus e voe kaset Yann, hag eñ ereet, eus Efezos da Roma, lec'h ma voe kondaonet gant ar Sened da vezañ taolet en ur gaoterad eoul berv, dirak an nor gêr anvet Porta Latina. Hogen dont a reas er-maez eus ar gaoterad dibistik ha yac'h pesk, evel ma vez danevellet gant Tertullian.

- E 259, e Lambaesis e Numidia, merzherenti **ar sent Marian ha Jakez**.

Marian, hag eñ lenner e kumuniezh Cirta (hiziv Constantina en Aljeria) a oa bet harzet endeo da-geñver heskinadeg Decius ; tapet un eil gwezh gant an diagon Jakez e voent merzheriet war un dro gant kristenion all niverus.

- E 698, **sant Eadberzh**, eskob Lindisfarn.

Da gentañ manac'h beneadat, e voe dibabet evel warlerc'hier sant Kutberzh e penn eskobiezh Landisfarn. E anaoudegezh eus ar Skritur Santel, e vuhez reoliek hag e garitez a dalvezas dezhañ bezañ brudet kaer.

- E 1708, **ar gwenvidig François de Montmorency-Laval**, eskob kentañ Kebek.

Ganet eus un tiegezh noblañsoù a Vro-C'hall, e strivas a-hed tost 50 vloaz da gadarnaat ha da astenn an Iliz er vro.

- E Kolun, er ^{V^{vet}} kantved, merzherenti **santez Avei** (Gl. Avoye, Aure pe Aurée), gwerc'hez, keneilez santez Ursula.

- War Enezenn-Vreizh, er V^{vet} kantved, **santez Gwenn pe Yulizh**, gwreg sant Peran, mamm sant Padarn.

- E Breizh, er VII^{vet} kantved **sant Inioleg**, eskob Gwened.

- En Iwerzhon, er VII^{vet} kantved, **sant Kolman Corcaigh**, beleg.
Edo e penn skol Finbarr pa skoas darreuziad ar vosenn velen. Skrivañ a reas ul *lorica* o c'houlenn gwarez Doue hag ez eas da repuiñ gant e skolidi war un enezenn.

- Dedi iliz metropolek Roazhon.

- **Treuzlec'h relegoù sant Melar.**

D'ar 7 a viz Mae

- War-dro 95, e Roma, merzherenti **santez Flavia Domitilha**.

Hag hi nizez an impalaer Deditianus ha gwreg ar c'hoñsul Titus Flavius Clemens e voe tamallet da vezañ andoue evel he gwaz, dre ma oant deuet da vezañ diskibled ar C'hrist. Hangaset da enez Ponza e tiwaskas un hir a verzhherenti.

- E 721, **sant Yann Beverley**, eskob Evrog (Eoforwic ; York).

Da gentañ manac'h en abati daouel Whitby bet diazezet gant santez Hilda e voe anvet eskob Hexham ha da c'houde eskob York. Echuiñ a reas e vuhez e manati Beverley en doa diazezet.

- Er VII^{vet} kantved, **sant Serenig** (Cénééré e galleg), manac'h, **ha sant Seren** (Cénééri), eskob.
Genidik eus Spoleto en Ombria ez eas an daou vreur d'en em lakaat e servij ar pab e Roma hag ez ejont da venec'h veneadat. Dont a rejont da weladenniñ bez sant Varzhin e Teurgn hag hini sant Juluan er Mañs. Serenig a echuas e vuhez en digenvez ha Seren a voe abad ur gumuniezh.

- War-dro 1060, **ar wenvidigez Jisela**, gwreg hag intañvez sant Stefan roue Hungaria, mam sant Emerig.

Skoazellañ a reas he gwaz da ziorren ar feiz. Goude marv hemañ e voe riet eus he danvez hag harluet. En em dennañ a reas en abati Niderburg e Bro-vBaiern lec'h ma voe abadez.

- E 1749, e Saint-Laurent-sur-Sèvre e Bro-C'hall, **ar wenvidigez Marie-Louise Trichet**, gwerc'hez.

Tizhet gant sant Loeiz-Vari Grignon a Voñforzh e teuas da vezañ diazevourez Kongregadur Merc'hed ar Furnezh a renas gant arboellerezh.

- E Breizh, er IV^{re} kantved, **sant Derien ha sant Neventer**, feizvonnourion.

Breudeur e oant ha ganet o daou war enezenn Vreizh. Da birc'hirinañ da Jeruzalem ez ejont hag o tistreiñ e argasjont un euzvil e Bro-Leon lec'h m'eo bet roet o anv da barreziou Gwineventer ha Sant-Derc'hen e-kichen.

- E Breizh, er V^{vet} kantved, **sant Kustentin**, mab sant Salaün I^{añ}, roue Breizh. Gant e vreur Aodren e vije aet da birc'hirinañ da Jeruzalem. Aodren a voe roue war-lerc'h e dad e 435 ha Kustentin e vreur a vije bet roue Bretoned tramor. War an hañval eo bet kemmesket o buhez avat gant hini sant Derien ha sant Neventer.

- War-dro 685, **sant Maelgizil pe Madelgizil**, penitiour iwerzhonat, diskibl sant Fursa ha keneil sant Vulgan.

D'an 8 a viz Mae

- E 303, e-kichen Milano en Italia, merzherenti **sant Victor**.

Maorad a orin, e oa ur c'hristen anezhañ abaoe e vugaleaj hag e servije e kampoù lu an impalaer. Pa fellas da vMaximianus e rediañ da aberzhiñ d'an idoloù e tilezas an armoù. Neuze e voe kaset da Lodi lec'h ma voe merzheriet ha dibennet.

- E 449, distro da Zoue ene **sant Arsen**, penitiour diagon e gouelec'h Sete.

Kelenner-ti mab an impalaer Teodoz e oa p'en em dennas er gouelec'h evit bezañ penitiour er bedenn hag er binijenn.

- E 492, **Emziskouezadenn Sant Mikael war Menez Gargan** da eskob Kêr-Sipontum en Italia o c'houlenn e voe graet ur santual er c'hev hag o c'hrataat gwareziñ ar gêr diouzh aloubadegoù ar baganed.

Diwezhatoc'h, d'an 8 a viz mae 663, en em ziskouezas c'hoazh sant Mikael war an hevelep menez, gant e gleze lugernus, o tegas an trec'h d'al Lombardiz enep d'ar C'hresianed feal da impalaer Kêrgustentin.

- E 550, **sant Dezire**, eskob Avaricon (Bourjez).

Bez' e voe kañseller ar roue hag unan eus an eskibion bouezusañ ar mare merovingat.

- E 615, e Roma, **sant Bonifas IV**, pab.

Gounit a reas ar Pantheon digant an impalaer Phocas hag en troas en un iliz en enor d'ar Werc'hez Vari ha d'ar verzherion.

- War-dro 652, ganedigezh en neñvoù **santez Ida Iduberga** (Itte Iduberj) a **Nivel** (Nivelles), leanez. Hag hi gwreg Pepin Landen, maer palez Dagoberzh I^{añ} roue Aostrazia, e tiazezas manati daouel Nivel eus reolenn sant Koulman-Veur a voe renet gant he merc'h santez Jertruda. Eno e echuas he buhez evel manac'hez.

- E 685, e Roma, **sant Benead II**, pab.

Mignon ar baourentez, uvel, kuñv, e voe heverk e vuhez dre e habaskted hag e aluzennoù.

- En Italia, **Itron-Varia ar Rozera** e Pompei.

- E Breizh, VI^{vet} kantved, **santez Tunvell**, Hervez an hengoun lec'hel e vefe c'hoar sant Izuned ha mamm sant Meven.

Roet he deus he anv da barrez Landunvez e Bro-Leon hag ez eo patromez parrezig Bodlezan e Bro-Dreger.

- E Breizh, er VI^{vet} kantved, **sant Dominus (Doininus)**, eskob Gwened,

- War-dro 515, **sant Givrian** (Gl. Gibrian), beleg iwerzhonat pe vreizhat, abostolour e Campania (Champagne) gant e vreudeur ar sent Avran (Gl. Abran), German (Gl. Germain), Gweran (Gl. Véran), Helan (Gl. Hélan), Peran (Gl. Pétran) ha Trezan (Gl Trézan). En em staliañ a reas e-kichen Durocatelaun (Châlons) en ul lec'h a zoug c'hoazh e anv.

- Er bloaz a c'hras 700, merzherenti **sant Gwiron (pe Wiron) Roermond**, eskob. Genidik eus Bro-Skos e tiazegas ur manati en Izel-Vroioù hag e voe urzhiet eskob gant ar pab sant Serj I^{añ}. Lazhet e voe gant e geneiled ar sent **Plechelm** hag **Oger**.

- E 1994 e Tizi Ouzou en Aljeria, merzherenti **ar gwenvidig Alan Dieulangard**, beleg eus Urzh an Tadoù Wenn, merzher. Genidik eus Sant-Brieg e tremenas e vugaleaj en Oriant. Drouklazhet e voe e porzh e bresbital d'ar 27 a viz Kerzu 1994.

- En eskobiezh Sant-Brieg **Itron-Varia ar Goubeizh** (gwezhall d'an 2 Mezheven).

D'an 9 a viz Mae

- War-dro ar bloaz a c'hras 95, merzherenti **sant Hermas**, feizvonnour, diskibl sant Paol, meneget en e lizher d'ar Romaned.

War a lavarer e vije bet eus un tiegezh a Vro-C'hres staliet en Italia. Hervez ar C'hresianed e vije bet eskob Phîlippi e Makedonia pe Philippopolis e Trakija ha merzheriet.

- E 348, en Egipt, **sant Pakom Tabennêsis**, abad, diazeour an dreveion. Soudard ha pagan c'hoazh e oa pa ganttroas o welout karitez ar gristenion evit ar vac'hidi. Resevîñ a reas ar sae vanac'h digant sant Palemon ha seizh vloaz goude diwar gemenn an neñv e savas manatioù evit degemer diskibled hag e savas ur reolenn evito.

- E 1679, e London, merzherenti **ar gwenvidig Tomaz Pickering**, manac'h beneadat a chomas feal d'ar feiz katolik ha d'e leoù betek skuilhañ e wad.

- **Treuzlec'h relegoù sant Nikolaz ar Burzhudour**, eskob Mura, da vBari en Italia.

- E Breizh, er V^{re}-VI^{vet} kantved, **sant Tudi**, penitiour.

O tec'hout rak ar Skoziz hag ar Bikted oc'h aloubiñ Breizh-Veur lec'h ma veve en digenvez e teuas da Vreizh hag en em stalias e 388 war Enez Groe gant sant Bodvael lec'h ma voent diskibled sant Buzeg (Budog).

- E Breizh, er VI^{vet} kantved, **sant Evarzeg pe Tevrideg**, abad kembreat a ziazegas ur manati a vez meneget e Diellevr Landevenneg. Lezet en deus e anv da barrezioù Landrevarzeg ha Sant-Evarzeg e Kernev.

- En Iwerzhon, er V^{vet} kantved, **sant Santan** pe **Santín**, eskob.

